

GOUEL AR PRISONNIDI

1

370

Parrouz Magor a neuz zavet
Eur gouel, ar ganaouen
Vit ar zoudarded divroet,
A c'houl eun aluzen.

2

Potred Magor hon c'harante
'Zo padus ha gwirion,
An envor ha chom noz ha de
E goëled hon halon.

3

N'euz Ilis ken koant barz ar Vro
Vel Ilis ho parrouz,
Pegouls a vefet oll dizro,
Dishual a didrouz.

4

En tiegez a zo glac'har,
Anken ha hirvoudou,
Hirr ha rust eo hent ar c'halvar
O sonjal n' ho poaniou.

5

Eun tad, eur vam et war an oad,
Straket gant al labour,
A dalc'h kaloneg war ho stad
O c'hortoz ar zikour.

6

Eur c'hrewg iaouank gwir Vreizadez
Bepred leal ha fur,
A ren méréri, tiegez,
He spered zo distur !

7

Bugale vihan, krennarded,
N' ho deuz met eur mennad,
Gwelet dizro ar zoudarded
Ha digemer ho zad.

Dre oll an tier zo goullou,
 Ar botred zo kollet,
 N'int ket trec'het gant ar maro,
 Prestig vefont kavet.

Ar garante 'ra burzudou,
 Dreist oll kreiz ar glac'har,
 Zillet' deuz ar c'halonou
 Gant ar chaden dispar.

An harlu a zo hirr amzer,
 Poan a gorf a spered,
 Nag an distag nag ar pelder
 N'hell torri an esper.

An esper da gavout an ti
 Kerent ha krenvroiz...
 Neuze vo fin d'an disparti,
 Ar gortoz zo iskis.

Vit zikour ar prisonerien
 Eo ret kas pakajou,
 Piou a gredfe nac'h e skoden
 Da wellat ho frejou.

Digoret ho ialc'h, ho kalon,
 Roet paper, arc'hant,
 Hirie ma ar gouel, ar pardon,
 Pardon ar Zakramant.

Parrous Magor a zo dister,
 Goulen 'ra ho skoazel,
 Vit eur wej na zellet ket berr,
 Tud vad a Vreiz-Izel.

Hirie dreist oll bezet true
 Ouz hon zoudarded paour :
 « Trugare ha bennoz Doue
 Ouz ho feurz a zo aour. »